

STAJ C'HOARIVA

Digor d'an holl, komedianed,
d'ar re o deus c'hoant dizoleiñ ar c'hoariva
pe o deus ezhomm komz dirak tud.



Gwellaat e yezh en ur c'hoari margodennoù

D'ar 16 ha d'ar 17 a viz Meurzh 2013 e Ty Théâtre Gouesnac'h

EVIT PIV ?

D'an holl re o deus c'hoant gwellaat o brezhoneg evit c'hoari war ul leurenn pe evit komz dirak an dud ha dizoleiñ war an dro bed marvailhus ar margodennoù.

PAL

Deskiñ ober gant margodennoù. Implijout margodennoù evel ur benveg pedagogel a-benn gwellaat e yezh a-fed distagadur ha pouez-mouezh. Sevel sketchoù a-unan pe a-stroll gant margodennoù.

PROGRAM

Sadorn :

- Prezantiñ ar staj : kalite ar yezh en ur c'hoari gant margodennoù
- Dizoleiñ jestroù kentañ ar margodenniñ
 - Teknik 1 : margodenniñ war wel
 - Teknik 2 : margodenniñ a-dreñv ur ridevenn
- Labour unan-hag-unan, daou-ha-daou pe ouzhpenn evit sevel sketchoù

Sul :

- Margodenniñ evit sevel sketchoù (kendalc'h)
- Prezantiñ un arvest gant sketchoù bihan savet e-korf ar stajig

Taolit evezh : Gallout a ra pep stajiad dont gant ar margodennoù a blij dezhañ.

STUMMER



Klaod-Yann AR RUYET

Skrivagner eo Klaod-Yann. Sevel a ra pennadoù-skrid, barzhonegoù hag arvestoù evit ar vugale. Margodenner eo ivez.

Graet en deus un enklask war ar c'helenn hag an distagadur e brezhoneg. Un dezenn en deus kinniget Klaod-Yann e 2009 e Skol Veur Roazhon anvet "Parole, liaison et norme".

PELEC'H ?

E Ty Théâtre e Gouesnac'h, ul lec'h moutig kenañ gouestlet d'ar margodennoù.

www.ty-theatre.com

PEGEMENT ?

45 € ar staj / 20 € da reiñ en a-raok.

Studierien ha tud dilabour : 35 € ar staj / 15 € da reiñ en a-raok.

Ma n'oc'h ket 'barzh ur strollad ezel deus C'hoariva e vo ret deoc'h paeañ skodenn ar gevredigezh : **10 €**

Diskoulmoù a vo kavet m'ho peus c'hoant chom da gousket d'ar Sadorn noz. Lârit deomp en a-raok.

LAKAAT HO ANV HA TITOUROÙ

choarivabrezhonek@gmail.com

06 38 78 35 15

Staj aozet gant ar gevredigezh C'hoariva - www.teatr-brezhonek.org